

ITRON VARIA ESPÉRANZ

WAR DON :

Elez deuz ar Baradoz... pé don Kelven.

DISKAN

Gwerc'hez, mamm a Espéranz, chelaouet hon féden,
Pa-z-omp aman dirédet d'ho kwélet a vanden,
Da c'houlén gras ha zikour, fianz ha karanté,
Evit Frans hag ann Iliz, dré zaouarn Mamm Doué.

1.

Hon Mamm gér Zantez Anna e deus hon chélaouet ;
Ha Doué madélézuz (hé hano bet meulet),
En deuz ivé war-n-omp holl gret eur zell a drué ;
Ar Franz a denn hec'h alan : mé gréd é deuz bué.

2.

Ann Iliz a zo gwasket zivoaz ! enn pép kosté,
Pi Nao zo prizoniet gant eur roué difé,
Eskibien ha béléien enn bro al liberté
A renk kwitat ho denved, ha gonid ho bué.

3.

Ann ifern dichadennet a glaské hon lonka
Ha Satan dindan hé dreid a glaské hon mac'ha.
E kalz a vroio hirié en deuz zavet he dron :
Ha pa ran war-n-hé eur zell, eo mantret ma c'halon !

4.

C'houi éta, Gwerc'hez zantel, o Mamm a Espéranz,
Deud gant eun dorn a drué, ha zikouret ar Franz ;
Rak hi eo bépred ar vro a zo galvet gand Doué,
Evit zouten hé Iliz, évit difen ar fé.

5.

Hi c'houlen bennoz Doué barz al léc'hio zantel,
Mont 'ra é prosession, a dost ével a bell ;
Da *Lourd*, da *Zantez-Anna*, da *Baray-Monial*,
Da *Chartr* ha da *Zant-Michel*, ha kalz ilizo all.

6

Da *Rumengol*, d'ar *Folgoat*, da *Iliz Gwir-Zikour*,
Da *Zant-Ervoan*, da *Loret*, *Matilin-Monkontour*,
D'ann *Itron-Varia-Drué*, da *Chapel Zant-Karé*,
D'ar *Salet* ha d'ar *Sklerder*, da c'houl grasso Doué.

7.

Gwir éc'h eo é deuz péc'het ! Anzao a ra hirié
Eo bet amzent 'nn ho kéver : nac'hed é deuz Doué !
Mes hirié 'teu d'ho pidi Itron a Espéranz !
Deud éta, Mamm a drué, ha harpet c'hoas ar Franz !

8.

D'ann Iliz roet ivé hé feuc'h, hé liberté,
Da Bi Nao, ar Pap zantel, astennet ar vué,
Ma wélo arog mervel ar fé c'hoas o luc'han,
Hag énébourien Doué o tistrei oll out-han.

9.

Gret ma vo fin d'ar brézel ébarz ann oll broio.
Ma vo 'touez ar bobl kristen ar peuc'h er c'halonno,
Ma reno mestro zantel war hoc'h holl vugale,
Ma véfomp oll unanet é karanté Doué.

10.

Mari, mamm a Espéranz ! c'houi zo oll galloudek,
Diwallet na zeui hon bag da stoka er garek !
Franz a c'houlén ho zikour da gnerzet en hent mad,
Pell zo ec'h eo dihenchet ; deût d'hé sturian ervâd.

11.

D'hon Eskop muia-karet, roet nerz ha iéc'het,
Ma chommo meur a vlavez é touez he Vrétonned !
Krenved eo bet gant bennoz ar Pap, hon Tad zantel;
Gred ma vo c'hoaz pell amzer o rén hé bobl fidel.

ER CHAPEL

12.

Aman, o Gwerc'hez zantel, a galon daoulinet.
Daëro ouz hon daoulagat, hon c'halon bruzunet
Omp deut oll évit pédi Kalon zakr a Jézuz,
Ha c'houi ivé, Mamm déner, Gwerc'hez karantézuz !

13.

Holl Zent euz ar baradoz hon zikouret ivé.
Ma c'heulfomp holl a-unan lézen ar gwir Doué :
Ha mar renkomp er bed-man beza c'hoaz kastiet,
Bet trué ouz hon iné, o Mamm mui-karet.

14.

Roet d'imp neuz ha kalon da c'heul lézen Doué
Ar vué a zo ken ber, hir ann éternité
Ha buan ec'h ankoéfomp ar poanio tréménet,
Pa véfomp o tiskouiza é palez an Drindet.

Lann-huon, ann eiz-war-n-ugent a viz Eost 1873.

ERVOAN HERNOT.

Imprimatur

Brioci, die prima Septembris 1873.

† AUGUSTINUS.

(Propriété.)

AVIS. — Ce cantique se vend à la librairie de
M^{me} V^o LE GOFFIC, à Lannion.

Lannion, imprimerie J. Mauger-Le Goffic.